

YF_0080_Ar c'hentan gwech 'm-boe graet al lez

Ar c'hentan gwech 'moe graet al lez
Mari 'ra din c'hoarzhin
A oe da verc'h un intanvez

Mari ra ra dik a dak dik
Mari ra ra dik a dak dak
Mari 'ra din c'hoarzhin

A oe da verc'h un intanvez
A oe 'kanno war vord ar wezh

Pe oe diskoc'h ar gannadenn
Oem aet on-daou d'ar waskadenn

Pe oe disorc'h ar waskadenn
Oem aet on-daou d'al ledadenn

Pe oe disorc'h al ledadenn
Oem aet on-daou d'an disheolienn

Oem aet on-daou d'an disheolienn
Debrin per hag avalou melen.

La première fois que je fis la cour
Marie me fait rire
C'était à la fille d'une veuve

C'était à la fille d'une veuve
qui lavait au bord du ruisseau

Quand le linge fut lavé
Nous sommes allés le tordre

Quand le linge fut tordu
Nous sommes allés l'étendre

Quand le linge fut étendu
Nous sommes allés à l'ombre

Nous sommes allés tous les deux à l'ombre
Manger des poires et des pommes jaunes.